

**Laterre.** (Bodlann).(Karaez, 1887 – Pariz 1918). Doujañs. (diwar-benn Tiercelin, Kerzilin))  
Modernnaet eo bet an doare-skriva.

### **Doujañs**

O ! Kerzilin, gwir vab or Barzed koz gwechall :  
Gwennhlan, Taliezin, Brizeux, Marzin, Riwall,  
Breiziz a gan hirio da spered ken uhel  
A veulas a-viskoaz da vro ger Breiz-Izel !

Or bro goant a zache da zellou, da gleved,  
Da galon, da ene, da gorr ha da spered.  
Da werziou a gane or gouenn hag he braster  
Oh entana spered Breiziz leun a breder.

Barz Kerazur, doujet en or Breiz penn-da-benn,  
Te 'oa greet 'vid derhel alhwez ar wirionez  
A dlefe digeri d'an oll hent ar Furnez.

Ra deuy da skeud, dalhmad, da bara war or penn !  
*War A-raog* e kerzim, hag or spered digor,  
'N eur heulia da skwer vad war douar koz Arvor !